

472

Da Vemor

Ar General Cambron

(402, suite)

Ganet e Sant-Sebastien, tost da Naonet, ar 26 eus a vis gerzu 1770,
 Maro e Naonet an 28 guenvour, 1842, oaget a 71 bloas.

Breizis! bezomp en caon hac en glac'har ive :
 Ar General Cambron zo disqennet er be!...
 Oll e tleomp santout angen vras en hor c'kreiz,
 Rac eveldomp e voa eur buguel eus a Vreiz.

Pa gommenças genta ar revolution,
 E savas en e za qerqent an nation
 Da stourm enep fulor an oll adversourien

(403)

A voa en em armet enep ar Francisien .
 Cambron, en giir Breiziad, ha carquet a gourach,
 A red vel eul leon da ^{stourm guz} ~~ampesk~~ o arnach

A boan a ugent vloas en em gave oaget,
 Ma talc'h penn e peb lec'h d'an oll enemiet.
 Heuillomp, Breizis, heuillomp Cambron hor c'henvroad,
 Humez ha generus e creiz nevez ar gombat :
 Ar fatic, ar privder, an naon hac ar sec'het,
 Ar mang eus a bep tra, cousquet var ar c'halet,
 Cambron a zouffr de oll, hep dont da vurmuri,
 Rac evit e vam-brô eo en em sacrifi.

Eur b'elleg, gemeret en un amzer eurzus,
 Zo casset gant Cambron da dij eram da guz,
 En risq eus e vue; mes Cambron, den humen,
 Voe atao soudard mad ha giir Breiziad christen.
 Un deiz e voe savet astennet en eur fos,
 El lec'h ma gemere un nebeudic repos,
 Rac aon da geni re habitantet ar vro,
 A loge soudarded leiz o zy tro var dro.

En amzer ar brezel civil eus ar Vande,
 E cass prisonnierien da guer Naonet un de,
 Er tonch vijent trêtet e quis prisonnierien;
 Mes qerqent o clêvet voant preiz d'ar bourevien,

(404)

Na guemer nep repos gen a vo assuret
 En devo ar boneur ma vezint savetet.
 Denoncet eo qerqent : an denonciatour
 A zo anavezet. Cambron en deus sicour
 Gant an oll zoudarded, testou eus e vaillanç,
 Hac e savetaont Cambron, harros a Franç.

En affer horrerus demeus a Guiberon
 E veljot petra voa humanité Cambron :
 Savetat a eure calz a royalistet,
 En danger da veza e-unan fusuillet.

Mes ar brezel civil a-deu d'en ^{disputa.} fatiga,
 Hac e qerz d'an arme a gommand Massena.
 En Zurich e tisqeus courach ar Francision :
 Gant eur gompagnunez eus a c'grenadourien
 E qemer canonion ; daouzec cant prisonnier
 En e varch triumphant er ruyou eus a quier.

(405)

Tri mil Russ a ^{bandon} gubrit gant pevar-ugent den :
 Caër o deus resista ... o effortehou zo ven.
 Cambron voa cabiten eus ar grenadourien
 Pa gouez La Tour - d' Auvergn etal Hauber - Oden.
 An arme a eur vouez, oc'h anaout e vaillanç,
 En hanv eno diou' hta Genta Grenadier Franç ;
 Mes Cambron, re vobest, a refusas bepret
 An titi qer glorius en devoa meritet.

Ar Bruss hac ar Pologn, ar Spagn a zo testou
 Eus a gourach Cambron hac eus e driomphou.
 Saragoss ha Jena, Dresd, Hanau ha Lutzen,
 Wagram hac Austerlitz, ha Craon ha Bautzen
 A zo ive testou eus a gourach ardant
 Cambron, harros a Vreiz, scoier eus an dud vaillant.
 Mes bataill Waterloo, deiz horruhl a garnach,
 A vel Cambron eno o combat gant arrach.

(406)

An enemiet oll, forcet d'en admira,
 A gri : Vaillant Cambron ! net eo en em rente
 Cambron, blesset horruhl, a respont, indignet :
 Nan ! nan ! Ar Gouard a varv, mes na en em rent qet !!
 Trio ar bed o deus grêt e gomzou solemnel :
 Hano Cambron a vo da vigen immortal.
 P'oe achu ar c'harnach, prest e voe dastumet
 En eur stat an tristâ a doues ar re vlesset.
 Casset voe da Vro - Saurz, eguis ur prisonnier,

474

E pelec'h e pede atao vit ar Franç ger.
 Birvigen ne alfet donet da ~~miseri~~
 E actou a gourach er Pruss hac er Russi,
 Coulz hac er vroyou all ey deveus combattet,
 E pere ras prouven eus e gourach parfet.
 E garantez brassa voa evit e Vam-bro;
 Atao eo bet fidel dei betec ar maro.
 Gant un orgouill leal e tle ta peb Breton
 Trial, unanet oll : Gloar da Vernor Cambrou !!!...

20 c'hoevrer 1842. A. Lédan.

Adreset da A. m'êr Naonet.

(Vol. IV, p. 402-406.)